


A

N NADOZIG
VURZHUDUS




N

AN NADOZIG VURZHUDUS

Brezhoneg gant Kenan Kongar

Gwechall-gozh e oa — kement-se a oa pell a-raok na oa anv eus fuze, eus kirri-nij, eus kirri-tan, na zoken eus marc'hoù-houarn — ur paotr yaouank kuitaet gantañ ti e dud evit mont da redek bro.

Hag ur wech ma oa distro d'ar gêr, hag eñ mall warnañ da gontañ e droioù kaer, e kavas disouezhenn : goullo e oa e di, e dud o devoa dilojet



ha kaset pep tra ganto : ne chome ket ur pezh-arrebeuri, nag ur skudell, nag an disterañ pezh dilhad. Saig, hennezh oa anv ar paotr, a oa war-nes mont kuit, dic'hallus ma oa chom da vevañ en un ti ken goullo, pa baras e zaoulagad war un draig a oa o luger-niñ war al leur-zi. Hag eñ plegañ ha tapout krog en... un nadoz.

Ya, un nadoz da wriat, heñvel-mik ouzh pep nadoz all, hirik ha solut evel ma veze nadozioù an amzer-se, lemm he beg ha divergl-mat.

Hag eñ da soñjal, en ur sellout ouzh an nadoz, e oa etre e vizied an dra nemetañ a vije chomet war-lerc'h e vamm pa oa bet dilojadeg. Ha setu ma klevas ur vouezh o tont eus kraoenn an nadoz — an toullig a lakaer an neudenn da dremen drezañ, gouzout

a rit —, ur vouezhig hag a lavare : « Saig, evidout-te eo ez on chomet war-lerc'h en ti, sur ma oan e teufes en-dro. Laka ac'hanon e tu enep da borpant ha kas ac'hanon ganit. Keuz n'az po ket ! »

Saig, gwelet gantañ traoù eus ar souezhusañ e-pad e droiad, ne voe ket souezhet an disterañ o klevout an nadozig o komz outañ. Tremen a reas anezhi en danvez a-dreñv pleg e borpant hag eñ en hent adarre, leun a fiziañs en e blanedenn.

An nadozig a oa speredek-bras hag iskis. Ar graoenn anezhi a dalveze dezhi koulz da c'henoù, da lagad, da skouarn ha zoken da fri. Hag hi o laret da Saig : « Me oar eo krog an naon ennout, met santout a ran c'hwezh ar sivi er c'hoad-mañ. Mat



e ve dit ehanñ ur pennad » pe c'hoazh : « Skuizh e rankez bezañ o kerzhout, klevout a ran o tont ur wetur. Gra sin d'ar blenier hag e keme-ro ac'hanout gantañ » pe neuze : « Sell du-hont etre an torgennoù, eno e weler toennoù ur gêr, hag eno e tlejes chom a-sav, labour a gavi du-hont ».

P'en em gavas Saig er gêr-se e oa anat-mat dezhañ e wele ivez an nadozig eus a-bell. Hag ur vignonez dreist e oa rak kentañ stal a welas a oa unan kemener. Ur skritell a oa skrivet warni : « Klask a reer ur c'hemener yaouank », ha setu ma voe gopret Saig. Biskoazh c'hoazh n'en devoa gwriet, nemet da adstagañ ur bouton ouzh e borpant pa zeue dezhañ distagañ, e-keit ma oa bet o redek bro. Bremañ avat e lakae e nadozig vurzhu-



dus da vont en-dro hag al labour gwriat a veze graet anezhañ e-unan. Ar c'hrafoù munutañ a zeue an nadozig a-benn anezho, ken ne oa ket tu d'o gwelout war ar mezher ; skedus avat e oant war ar seiz ha start e-barzh al lien. A-walc'h e oa da Saig he broudañ el lec'h ma oa al labour da vezañ boulc'het hag ez ae en-dro betek penn ar gwri.

Pa ne veze mui a neud warni, pe pa veze e spered e lec'h all — gwall alies a veze-ehñ o sellout ouzh merc'h ar c'hemener. — a teue an nadozig da reiñ ur flemmig war e groc'hen evit e lakaat da zont ennañ e-unan.

Bemnoz e tremene Saig an nadoz en e vlev evit mirout outi da vergliñ hag he lakae neuze a-dreñv pleg e borpant a veze lakaet e-pign ouzh

kein ar gador e-kichen e wele.

Seza, merc'h ar c'hemener he devoa taolet evezh penaos e labourer an nadozig vurzhdus hag, un nozvezh e savas eus he gwele evit dont da dapout an nadoz-se. Pa welas petra oa c'hoarvezet e voe rannet kalon Saig. Met n'eas ket a zroug ennañ, ha pa welas an nadoz etre daouarn Seza ne lavaras tra, hag e stagas gant e labour, kentoc'h fall eget mat, gant un nadoz ordinal. E-keit-se edo ar plac'h o wriat gant an nadozig vurzhdus, met ne dae ket an traoù evel boaz kennebeut : krafoù dizingal a rae an nadozig, stagañ an eil ouzh egile daou wiskad danvez, ober gwrioù a-dreuz ha lakaat biz Seza da wadañ.

Ar plac'h yaouank, mall bras ganti echuiñ, a oa droug-ruz enni o welout



e ranke adkregiñ gant he labour hag e pade hemañ c'hoazh pelloc'h eget an devezhioù all. Gant kement a nerzh e lakaas an nadoz da vont e toull ar bouton m'he sankas er bouton-e-unan. Ha setu torret an nadoz ! Hag ar plac'h o skeiñ an daou damm d'an douar.

Setu neuze ar c'hemener o tont da welout penaos e oa kont gant al labour : nag e verc'h, na Saig n'o devoa graet netra a-zoare. Krozal a reas dezho o soñjal o devoa tremenet o amzer o klakenniñ hag e kasas pep hini d'e du da echuiñ o labour. A-raok sentiñ e klaskas Saig tammoù an nadozig hag o lakaas en e c'hodell. Ur wech el logig ma oa bet lakaet ennañ da labourat, setu ma klevas Saig mouezhig an nadoz ouzh e c'hervel : « Saig, Saig ». Pa lakaas e zorn en e

c'hodell e kavas an nadoz en he fezh prest da vont en-dro gant al labour gwriat.

— O, nadozig koant, perak out-te ken madelezhus ganin ha ne fell ket dit sikour Seza, a c'houlennas Saig.

Ha setu an nadozig o respont gant he mouezh sklintin :

— Dre m'eo diampart, feuls, drouk gant an traoù, ha te an eneb krenn. Ha te bihan, biskoazh ne skoes tao-lioù botoù en dorioù, ne wallgases ket binvioù ar jardin, o c'hempenn a raes goude al labour, lakaat a raes eoul gant potailh an nor, kempenn kolier ar c'hi ha troad ar bigell. Da vreudeur int ne raent nemet drailhañ pep tra. O gwelet em eus.

— N'em eus nemet ul lagad, hag un tamm pennig strizh, met gwelout



a ran pep tra hag evel m'eo bras va memor ha me mistrik-kaer e c'hellan kuzhat n'eus forzh e pelec'h. O gwelet em eus o stlejañ ar paneroù er pri, o lammat gant o boteier war ar bankoù hag o tiblouzañ ar c'hadorioù, o skeiñ gant ur maen war ar c'hontilli, o koagañ kastolodennoù evit o lakaat da dregerniñ.

Evel-se 'ta, pa fellas d'az tud mont kuit eus o zi, hag int o krediñ ne zeufes biken en-dro, (rak n'o doa ket komprenet pegen stag e oas ouzh da dud kar ha da di), traoù an ti a zo bet bodadeg etrezo hag holl a-gevret hon eus divizet e chomje unan war-lerc'h d'az kortoz. Evel ma oa me an hini bihanañ ez eo ouzhin-me ez eo bet goulennet chom : aesoc'h e oa din bezañ diwel pa vije dilojadeg. Aet on a



bennlammoù, ur wech war va beg, ur wech all war va fenn, da welout korriganez he c'hant dorn, hi hag a oar ober pep tra. Hi eo he deus desket din gwriat va-unan. Ha setu ! — Nadozig koant, ma teuan a-benn da lakaat Seza da vezañ eveziek e-keñver an traoù, da chom hep lezel ar sizailh da gouezhañ war he beg, da chom hep flastrañ he beskenn, ma teuan a-benn da lakaat anezhi da gaout doujañs ouzh an traoù hag ar binvioù, daoust hag e sikouri anezhi ivez ?

— Ya, Saig, gra buan avat. Gant ar c'hentelioù a roan dit e rankez deskiñ gwriat evel ur mestr kemener. Rak me a ya war goshaat, tognañ a ra va beg, uzañ 'ra diabarzh va c'hraoenn ha deiz pe zeiz ne vin mui evit derc'hel an

neud. An nadozioù ivez a varv, Saig !

Ha Saig o vont da gaout Seza ha kontañ dezhi istor an nadozig vurzhus war he hed. He lakaat a reas da vezañ eveziek war an traoù ha da ober war o zro evel ma vent bev. Buan ez eas Seza war wellaat : ne fulore mui, ne gave ket ken e c'hell an traoù bezañ drouk ha neuze e teuas an nadozig d'he sikour pa veze brouderezh luziet da ober, pe neuze pa veze ret labourat danvezioù bresk ha tener evel ar seiz. E-keit-se e veze Saig o labourat gant un nadoz ordinal. Dont a reas da vezañ ur c'hemener eus ar c'hentañ, rak tad Seza en devoa desket dezhañ penaos e vez troc'het danvez evit ober dilhad.

Diwezhañ pezh-labour a reas an nadozig vurzhus a voe gwriat dilhad



eured Seza gant Saig. Diwar neuze e c'houlennas an nadozig mont war he leve. Saig, evit bezañ sur-mat ne lakaje den anezhi da labourat en-dro, zoken ma teuje dezhañ he c'holl, a reas ganti ur spilhenn-brenn evit e gravatenn. Lakaet e voe ur maen prizius glas e toull ar graoenn ha lugerniñ a rae eno evel ibil lemm ul lagad.

Daou vugel, breur ha c'hoar gevell, a zeuas d'an daou bried nevez. Loeiza ha Loeizaig e voent anvet. Pa zeue d'ar re-mañ louzañ o dilhad pe derriñ o c'hoarielloù e lavare o zad dezho : « Diwallit ! Diwallit ! Emañ an nadozig vurzhudus o sellout ouzhoc'h ». Hag en doare-se e teskjont, int ivez, bezañ madelezhus e-keñver an traoù.


EMBANNADURIOU

AL

LIAMM

Brest

3



LEVRIOU AR VUGALE